

Tud ar vro - Bro Leon
Roll kanaouennoù - Dañs round

Da Vrest 'zo deuet ur vatimant

Da Vrest 'z eus deuet ur vatimant
A zo karget o lantigodo, a dud yaouank lanluro

Laeret o deus ur plac'h yaouank
Da gas ganto d'o vatimant

Ar plac'h yaouank sur a ouele
Ar vartoloded oll a c'hoarzhe

Plac'hig, plac'hig na ouelit ket
'vit ho puhez ne golloc'h ket

Evit ho puhez ne golloc'h ket
Mes hoc'h enor ne lavaran ket

Gwelloc'h ganin mervel mil gwech
Evit koll va enor na sur ur wech

Kar an enor ur wech kollet
Maniñ d'ur plass ne rafoc'h ket

P'edo paseal parkoù he mamm
He c'halonig a reas ul lamm

P'edo paseal parkoù he zad
He c'halonig a reas ur strak

War ar pont bras pa z'eo savet
Ouzh ar werc'hez 'neus respedet

Ma choman amañ 'vezin kollet
Ma 'z an er mor 'vezin beuzet

'Doa ket echuet mat awalc'h he ger
War he fenn er mor en em daolet

War he fenn er mor en em taolet
Ar plac'hig-mañ d'an azevent

Ma teu va merc'h-me d'ar gear
Kleier Montroulez oll a sono

Setu ar werc'h erruet er gear
Kleier Montroulez oll a zo bet

Kleier Montroulez a zo bet
Hag ar c'hleier all oll zo bet ivez